



30^{vet} Saloñs al levrioù 30^e Salon du livre

Kevredigezh Dañs Treger – Saloñs al levrioù

Ti an Holl, Plasenn Auvelais
22310 PLISTIN
pgz : 02 96 35 06 28
tianholl@plestinlesgreves.bzh

Reolennoù ar c'honkour mikro-danevelloù

D'ar sul 8 a viz Du 2026 e vo dalc'het Saloñs al levrioù Plistin aozet gant ar gevredigezh Dañs Treger, da-geñver Gouel bro Plistin. Ur saloñs deiz-ha-bloaz e vo : hini an **30 vloaz**. Kement ha lidañ an dra-se e vo aozet ur c'honkour mikro-danevelloù gant ar gevredigezh Dañs Treger.

N'eus netra da baeañ evit kemer perzh er c'honkour. Kemer perzh a dalvez doujañ d'ar reolennoù displeget amañ, doujañ da zibaboù ar juri ha degemer e vefe embannet an oberennoù gant ar gevredigezh Dañs Treger hep bezañ paeet evit kement-se.

Tem

N'eus nemet ur redi a-fet tem : an niver **30**. Ul liamm bennak gant an niver **30** a ranko bezañ gant pep danevell.

Yezh

E brezhoneg pe e galleg e vo skrivet an testennoù.

Stumm

Pep mikro-danevell ec'h aio **1000 sin** d'ober anezhi (hep kontañ an titl), war-vete 10 % muioc'h pe nebeutoc'h, ha kaset e vo e stumm **niverel nemetken** (skridtreter Word pe LibreOffice), dre bostel, e pezh stag.

Un titl a vo da bep mikro-danevell, ne vo ket dalc'het kont anezhañ evit kontañ ar sinoù.

Dizantv-krenn e rank bezañ pep testenn ha ne vo enni tamm tra ebet a-gement a c'hallfe reiñ da c'houzout gant piv eo bet skrivet.

Ne vo roet daveennoù an oberour/oberourez nemet er postel : anv, raganv, oad, chomlec'h. Titl ar mikro-danevell a rank bezañ roet c'hoazh ivez e korf ar postel.

Asuriñ groñs a ra an oberour/oberourez ne ray e mod ebet gant an Naouegezh Artifisiel.

Publik

Digor eo ar c'honkour d'an holl.

Daou rummad a vo (galleg pe brezhoneg evit pep hini) :

- Ur rummad Bugale/Krennarded digor d'ar re skoliataet betek al lise.
- Ur rummad Tud c'hour digor d'an holl re all.
- N'hall pep hini kas nemet un destenn (galleg pe brezhoneg).

Deiziataer

A-benn **ar 15 a viz Here 2026 da hanternoz** d'an diwezhañ-tout e rank an destenn bezañ kaset dre bostel da tianholl@plestinlesgreves.bzh

Juri

Priziet e vo ar mikro-danevelloù gant ur juri savet gant ar gevredigezh Dañs Treger. N'hall ket izili ar juri kemer perzh er c'honkour.

Evit ober e zibaboù e sello ar juri ouzh :

- Ar fed ma toujo an destenn d'ar vevenn 1000 sin (war-vete 10%)
- Perzhioù ar skritur hag ar stil
- Perzhioù dibar an istor
- Ar mestroni war ar yezh
- Ar fed ma kloto mat an destenn gant an tem

Prizioù

Anvet e vo 3 loread gant ar juri dre Rummad Tud c'hour (3 e galleg, 3 e brezhoneg) ha 3 loread dre rummad Bugale/Krennarded (3 e galleg, 3 e brezhoneg). Gallout a raio ar juri loreañ muioc'h pe nebeutoc'h eget 3 den e pep rummad ma kar, hervez an testennoù a vo roet dezhañ da briziañ.

Roet e vo ar prizioù da-geñver Saloñs al levrioù e sal an Dour Meur e Plistin **d'an 8 a viz Du 2026**.